

KIS-486 – Gl. antécédent

(GE – 07 02 96)

Orin ar Gl. eo La. *ante(ce#do* "mont a-raok, diaraogiñ". En e arver ken klasel, ken arnevez ez arouez an termen gallek an hini gentañ eus div elfenn diazalc'h loet e pep a boent eus un hevelep amzerelezh. An diazalc'h, stag erdalekañ a c'hallfe bezañ etre parzhioù (sl. KIS-349, La-09, pp. 19-25), 'm eus kinniget ober anezhañ ur *gemez*, ha hi desellet ken er gwerc'henoù (devoudoù, darvoudoù), ken en derc'henoù (riñvennoù, treolioù), ken er realenoù, ken erfin er prezeg (domani gwerc'hel, derc'hel ha realel war un dro). Pep hini eus an domanioù ma ambreder ur *gemez*, un diazalc'h etre div elfenn loet an eil a-raok, eben goude, zo dezhañ un amzerelezh dibarek : amzerelezh un elektronenn n'eo ket amzerelezh ur pezh c'hoari nag amzerelezh un treol. E se e stergnin dedro va notenn — he amzerelezh ! — en un trosell war un nebeut amzerelezhioù.

Kent mont pelloc'h e kinnigin un termen, n'eo ket keverdal dre ret marteze d'ar Gl. *antécédent*, met o tec'heriañ an despizadur emañ o paouez reiñ dezhañ. E luniañ a rin diwar Br. **kent-** hag ur verb **oriñ**, deveret eus hBr. **-or-** evel m'en kaver e *doguor* (sl. DGVB. p. 277), gentañ an durc'hadur ster "loc'hañ, sevel" : Br. **kentorad** g. a rafen eus an elfenn o sevel, o nodiñ da gentañ penn. Kendave dezhañ e rofen Br. **eilorad** da gevatal d'ar Gl. *conséquent*. Ganto hor be an termennoù erdalekañ, tonket enta da gvelañ termennoù arbennikoc'h war an dachenn-mañ-tachenn.

1. – AR GEMEZ EN AMZERELEZH AR PREZEG

E gramadeg ar galleg e reer Gl. *antécédent* :

a) eus un "termen amkanet da brientiñ ent gramadeg an dezrevell eus un termen all, anvet *conséquent* : *tel* zo *antécédent* da *que* e : *tel que* vous me voyez" (J. MAROUZEAU, *Lexique termin. ling.*, p. 22) ;

b) eus "ar ger a zave dezhañ ar raganv stagañ" (J. F. PHELIZON, *Vocab. ling.*, p. 17).

E gramadeg klasel ar brezhoneg, plaket war hini ar galleg, ne reer anv nemet eus ar ster b) hag e roer Br. **kenttermen** da gevatal d'ar Gl. *antécédent*.

Ne venn ket an notenn-mañ bezañ unan a c'hramadeg. Koulskoude e hañval din e c'hallfed brastresañ ur rummenn azasoc'h diouzh kevreadur ar Br. Ur staelad dioutañ en deus ar raganv stagañ e Br., ken dibarek ma'z a gramadegourion 'zo betek nac'h ez eus anezhañ. Hemañ ne oa ket meno gramadegourion SADED, nemet e chomas o damkanadur e darn ; digej a rejont keal un daouad (**dreist**)**ambilh** – **azgeriad**, hep kas da benn e savlec'hiadur en ur genad e-kichen spesadoù all a zaouadoù kentorad – eilorad a ve en o zouez ar **c'henttermen** – **adanvenn**, ar **valegenn** – **ategenn**, an daouad meneget en a) diaraok, h.a. Da envel ar genad-se a zaouadoù gramadeg e rafen gant an termenou **streilh** – **askouezh**.

2. – AR GEMEZ EN AMZERELEZH AR GWERC'HENNOU

Div anadenn, daou zarvoud o c'hoarvezout e pep a boent eus an amzerelezh louet a c'hell bezañ etrezo diazalc'hioù diseurt : ma ne vez etrezo netra boutin estreget c'hoarvezout en un bed, ez eo euver moarvat komz a ziazalc'h en o c'heñver, nemet ez afed diouzh ur savboent trabedel.

A-gevenep, e c'hell bezañ etrezo un diazalc'h ken strizh ma'z eo an eil an heuliad ret d'egile, ma komzer eus diazalc'h savelek. E lec'h all (KIS-087, La-05, pp. 56 hh.) e'm eus klasket rummañ ar c'heñverioù savelek ha graet anv, etre termenou all, eus

Br. **trelenad**, Gl. *antécédent causal pe conséquent causal*.

Br. **raklenad**, **amlegad**, Gl. *antécédent causal* (kendave : Br. **dianlenad**, Gl. *conséquent causal, conséquence*).

Kinniget 'm boa deskrivañ e-kichen ar c'heñverioù savelek ur rumm “keñverioù diforzh (savelek pe ansavelek)” diziouerus e nep argerzh imboure'hiñ ar gwerc'hennou, rak “peurliesañ e stader ur c'hemmesk a geñverioù savelek hag ansavelek” ; menegomp da skouer an ematers a sav gant ar mezeg dirak un ezel seizet : “ Ha nerved eo, diwar un anaf en nervreizhiad, pe vredel, a-geñver gant ur buhezad ? ” : en degouezh kentañ e c'haller komz eus ur c'heñver **raklenad-dianlenad** ; en eil e ve andik e ober ; ne c'haller mont pelloc'h eget ar c'heal a :

Br. **treveziad**, Gl. *antécédent (causal ou non) pe suite (causale ou non)*,

ha naouaat orin ar seizi evel :

Br. **rakveziad**, Gl. *antécédent (causal ou non)*,

hag ar seizi e-unan evel :

Br. **dianveziad**, Gl. *suite (causale ou non)*.

Ur meizad all a arverer en imboure'h kantouezel eo ar **geflended** (Gl. *corrélation*) a ro tro da gementadiñ derez an drelenadelezh a zo er c'heñverioù treveziadel etre anadennoù (sl. KIS-374, La-09, pp. 244)

3. – AR GEMEZ EN AMZERELEZH AN DERC'HENNOU

Ned eo ket va frepoz spisaat keal an amzerelezh e domani an derc'hennoù. Anv a ran anezhañ e kement ha ma vez pleustroù, evel an *treol*, an *treuzfurmiñ*, oc'h ober stad eus un a-raok hag ur goude.

Er Boelloniezh klasel e reer eus an daou erganad (Gl. *proposition*) a ya d'ober an daouvarr (Gl. *enthymème*) : ar **ragerganad** (Gl. *antécédent*) hag an **dianerganad** (Gl. *conséquent*) (sl. KIS-359, La-09, p. 82). Ur furm all eus an daouad kentorad-eilorad er Boelloniezh hag er C'hramadeg a gaver gant ar seurtad balegenn-ategenn (Gl. *protase-apodose*) ez eo an dezrevellad tebiñ (Gl. *énonciation conditionnelle*), sk. : “Mar bez glav (Br. **kentorad**, Gl. *antécédent*), e chomin er gêr (Br. **eilorad**, Gl. *conséquent*)”.

Er Jedoniezh, pa saveler un arloadur f eus un teskad d'un teskad all : $x \mapsto y$, e reer eus x ar **c'hentorad** hag eus an eilorad keñverek y an **delvad**.

A-gostez e lezan ster buhezel ar Gl. *antécédents* : er Vezekniezh, an darvoudoù kleñvedel diagent c'hoarvezet gant ar gouziviad, er Barnerezh, felladennoù diagent ar c'hehuzed (er c'hemeradur-mañ e ve da gavout un termen spisoc'h eget ar valleeg **kentvuhez**). Hag ivez arver Gl. *antécédent-conséquent* er Sonerezh, daoust ma hañval an daouad **kentorad-eilorad** dereout eno ivez.